

Hag ar re zo ar mare d'ho skolia, d'ho c'helen,
Grit ma kavimp eyitho mistri vad ha kristen.

8

Lakit enn tiegeziou urz-vad ha peoc'h paduz,
Ma c'hellimp ho servicha dinec'h hag eüruz ;
Ha pa zeui pred ar maro, kemerit hon ene,
Gand eunn dourn madelezuz, d'her c'has dirag Doue.

9

Ra guezio gliz ho pennoz var hon holl douarou
Kemesket gand hor c'huezen da greski hor madou ;
D'heoc'h ha d'hor Sent patronet ni raio eul loden,
Hag ar paour, enn hoc'h hano, a gavo aluzen.

10

'Vit ma ouezo pep unan ez omp d'heoc'hui fidel,
Ni roi prof a greiz kaloun, da gaerat ho chapel,
Ma c'hello hor bugale evel d'homp, gand dudi,
Diredet, e peb amzer, el leac'h-ma d'ho pedi.

RESPOUNT ANN ITRON-VARIA

1

Kleveta am euz ho mennoz, va bugale garet ;
A viskoaz en em blijiz e touez ar Vretounet.
Evelato enn ti-ma lakeat kaer ha skeduz
Puiloc'h e skuilliñ var'nhoc'h grasou va mab Jezuz.

2

Divar c'horre ar menez, a dost koulz hag a bell,
Da bep hini ac'hanoc'h me roi bepred skoazell ;
Ha p'hoc'h euz' vit ma guiska roet hoc'h aluzen,
D'heoc'h ive, er baradoz, me zalc'h eur gurunen.

Imprimatur : Quimper, 1 Avril 1892, F. OLLIVIER, s. s. v. g. h.

(Daou bardoun er bloaz a zo e Menehom. Unan d'ann eil sul a viz mae, egile da c'houel. Maria Hanter Eost. Da holl gouelioù ar Verchez ha d'al lun Fask, e vez ive oferen vintin hag oferen bred er chapel-ze).

Châteaulin.— Imprimerie A. Corcuff.

KANTIKOU

EN HENOR

DA INTROUN VARIA MENEHOM

E parrez Plodiern

DISCAN.

Introun Varia Menehom,
Euz hor sicour ni'r beuz ezom ;
Pedit evit ho pugale
Jesus, ho Mab, hor guir Doue.

1.

Evel eun tour var an huel
'Zifen ar vro pa vez brezel ;
Ho chapel, Mari, zo savet
'Vit hon dioual dious drouc bepret.

2.

Pa deu ar gurun da grozal,
Gant dudi e velomp ractal
Oc'h ar menez en he za sounn
Ti hor mam ger hag hon introun.

3.

Ar c'hrouadur en he gavel,
'Vez goestlet deoc'h, o Mam zantel ;
Grit dezhan bale dre'n hent mad
Hag heul ato Jesus, ho Mab.

4.

An den yaouank e creiz ar bed
'C'houlouen sicour pa vez tentet ;
Sellit neuze, Mam a druez,
Sellit outhan gant carantez !

5.

Ar pec'her paour en he anken
Gant fisians 'ra deoc'h he beden ;
Pedit, Mari, pedit ho Mab
Da rei dezhan eur pardon mad !

6.

Pa vez ar mor braz e furol,
Tentral an noz, an avel fol,
Ar martolod 'gass he speret
Varzu ennôc'h, Mami benniget.

7.

Ar zoudard, kent mont d'ar vrezel,
D'ho saludi deu d'ho chapel ;
Ha pa vez eat pell diouz he vro,
Ouzoc'h e c'houlén an distro.

8.

En he beden diouz ar mintin,
Al labourer var he zaoulin
Ne ador morse e Zoue
Eb caout sonch ac'hanoc'h ive.

9.

An nep zo skoet gant ar c'hlenvét
A c'houlén ouzoc'h ar iec'het ;
Pe, mar guel ez eo red mervel,
E c'houlén ar maro santel.

10.

Ho mab, guezic'h all var an douar,
Savet er groaz var ar C'halvar,
En deuz da Zoue gounezet
Calounou an dud caledet.

11.

O pet sonch, Guerc'hez benniget,
Var ar menez o voac'h hanvet
'Vit beza d'an dud malheüruz
Eur vam sur d'ho c'hass da Jesus.

12.

Grit eta divar ar menez
Varnomp oll eur zell a druez ;
Bezit hor mam evit ato
Brema hag en heur ar maro !

Respount ar Verc'hez.

Va bugale, sellit huel,
Var ar menez ous va japel ;
Euz va sicour m'oc'h euz ezom
Deuit da japel Menehom.

Permis d'imprimer.

Quimper, le 18 mars 1870.

J. Jégou, Vicaire général.

Tox : *Santez Mari, mam Doue.*

DISKAN

Guerc'hez gloriuz Vari, patronéz Menehom,
Euz ho skoazell gallouduz ni holl hor beuz ezom ;
Pellañ, diouz ho pugale, peb droug ha peb enkreiz ;
Ha bepred ni ho meulo, er joa, el levenez.

1

E douarou Breiz-Izel, kalz plasou zo brudet,
Dre'r grasou kaer a skuillit var neb ho darempred ;
E Mene-Hom koulz goude, puilloc'h eo ho pennoz,
Rak m'eo tost d'he guern tizout beteg ar baradoz.

2

Pa ziskennit daved'homp, evit ho treid santel
Ann huella menezioù a zervic'h da skabel ;
Rak-ze, ouz ho kemeret evit ho rouanez,
Hon tud koz d'heoc'h a zavaz eunn ti var ar menez.

3

A hed kelliéz a gant vloaz, var'nhan euz tremenet
Eleiz a varrou avel, heb ma ve diskaret ;
Espernet gand ann amzer hag ann dud e kounnar,
Menehom a zo ato eunn iliz koant dispar.

4

Paotred yaouank ar c'harter, araok mont d'ann arme,
Zeu ama d'en em voestla da vuir vam ho Doue ;
Ra vezo ho preac'h nerzuz var'nezho estennet
D'ho difen euz ar maro hag euz a bep klenved.

5

Ken na vezint distroet ni zalc'ho aketuz
Da zigas sonj anezho d'heoc'hui, Mami druezuz ;
Hag o klevet ganheomp-ni ho haniou karet,
C'hui ho skrivo e kaloun Hor Zalver benniget.

6

Pa c'hell ho tourn gallouduz tizout bete pell bro,
Var ar barrez-ma ive, ho skoazell a jomo ;
Ho lagad karantezuz ne zarro birviken,
Bepred var'nheomp e paro birvidig ha laouen.

7

Mirit hor bugaligoù zo c'hoaz enn ho c'havel.
Grit ma chomint pell amzer templ-d'ar Speret-Santel,